



Invocation da Santes-Anna-ar-Palud

Var ton : *Me a laca ma fizianç.*

AR GRAGUES.

Glorius Santes Anna,
 C'houi oc'h eus concevet
 En ho cof sacr ar glana
 Eus ann oll guerc'hesed,
 Ha douguet var ho parlen
 Ho merc'h santel meurbed,
 Mari, ar gaera steren
 Eus en oabl alaouret.

GOASED HA MERC'HED.

Santes meurbet gloriüs,
Un deis ni a gano
Er barados dudius
Meuleudi d'hoc'h ano.
Da c'hortos, grit ma vezimp
Miret dious peb goall,
Ha dre ho ners ra vrevimp
Ieo ar sperejou fall.

Var ton : *Adoromp oll.*

AR VOASED.

Santes Anna,
Pe bris oc'h eus recevet
Evit maga
Rouanes ar guerc'hessed ?
Ne ouffe den compren
An dudi oc'h eus bet
Pa voac'h o tiorren
Mam Redemptor ar bed.

AR GRAGUES.

Peb udurnes
Oc'h eus pellocet diout-hi.
Ous ho furnes
Bepred e caras senti.
Redit e peb amser
Var hon tieguesiou,
Ma vezo gant preder
Heuliet ho quenteliou.

AR VOASED.

Mam hegarad,
Dalc'hit ato digoret
Ho taoulagat
Var zouar ar Vretonet.
Cassit pell eus hor bro
Ar sperejou direis,
Ha mirit var on tro
Ar re a zuj d'ar feis.

AR GRAGUES.

Mam a zouçder,
Enoret var ar Palud,
Hars hoc'h auter
Gand respet ni ho salud.
Mam d'or mam benigued,
Ha c'houi, he merc'h santel,
Ni a jomo bepred
Dezoc'h ho tiou fidel.

Litaniou Santes-Anna-ar-Palud

Santes Anna, c'houi a zo bet dilennet
Evit conceo mam hon Doue incarnet.
Ni ho salud, aienen bur ar guened !

Oh ! nac a vech, magueres leun a zouçder,
Oc'h eus laouen pocqued da vam hor Zalver!
Santes Anna, bezit mad en hor c'henver.

Ennhi oc'h eus laquet dre ho quenteliou
An ad santel eus ar c'haera vertusiou.
Santes Anna, renit hon tieguesiou!

E Breis-Isel, harsic ar mor fuloret,
Var ar Palud c'houi zo bepred enoret.
Santes Anna, protegit ar Vretoned!

Var an dour-sall, e creis ar stourm dirollet,
C'houi a zicour ar mordead desolet.
Santes Anna, ra vezot ato meulet!

Dre ho peden ar c'hlanvour paour a bare,
Ar mud a goms, hac an den cam a vale.
Santes Anna, r'ho meulint e peb mare!

Gant a bec'her eus Doue dispartiet
Dre ho sicour a zo bet difaziet.
Santes Anna, ra vezot glorifiet!

Endra baro an heol var an torguennou,
Endra luc'ho ar glis var ar glasennou.
Santes Anna, luc'hit en hor c'halonou !

Squis er bed-man, ho pugale a c'hortos,
Dre ho sicour, eurusdet ar Barados.
Santes Anna, scuillet varnomp ho pennos!

Cantik en honor da Zantes-Anna-ar-Palud

Anna, id est, gratiosa sive misericors.

Brema d'ou vil bloas tremenet,
E voa ganed e creiz bro Jude,
Caeroc'h 'vit an heol alaouret
Pa bar er goabrenn da c'houlou-de,
Eur grouadures sac'r meurbed,
A vugale Israel ar gaera,
A lignez huel ar Roued,
A berz Doue voa hanvet Anna.

DISKAN.

Santez Anna var ar Palud
Bezit da viquen hor patronez !
'Vel hon tud coz ni ho salud,
Diskuezit d'homp ker braz madelez.

Salud, o rozen d'udius,
Salud, o glana fleurdelizenn,
Salud, o guened burzudus,
Salud, o skedussa virlaouen !
Honor, ha gloar, ha carantez
Da Vam zantel ar Verc'hez Vari !
E peb korn a Vreiz da jamæz
Ra vezo canet he meuleudi !

An amzer bepret a dremenn,
Mæs ar feiz a zalc'h bepret kaled,
Startoc'h eget eur garregenn
Enep tauliou ar mor direized :
Evelse Feiz cre Breiz-Izel
A vo cavet trec'h d'an enebour,
Keit a ma chomfoc'h, Mam zantel,
Ganthi evit he ren, he sicour.

Endra vo tud e Breiz-Arvor,
Enn'hi vo canet ho meuleudi ;
Rac c'houi eo stereden ar mor
Sclerijen ha scoazel pephini.
E peb leac'h euz a Vreiz-Izel,
A vezo henoret oc'h hano,
Ha peb Breton, a vouez huel,
Daoulinet dirazoc'h a gano :

Piou a glevas laret biscoas
E deuz bet reüset eur beden ?
M'ar sco an anken voassoc'h voas,
Creoc'h ere d'an den e ro soutenn.
Deut oll eta, ho mam ho car,
Evidoc'h he c'halon zo digor :
Deut paourkez labourer douar,
Deut, tud a vizer, deut tud a vor !

Creiz eur glao, eur gurun euzuz,
Pa veler trec'het gant an diroll,
Labourou eur bloavez poaniuz
En eun deiz ebquen o vont da goll.

Enn eur astenn he dorn santel,
E teu da zavetei an douar :
He galloud ounthan a gass pell
Droug-malloz an amzer e kounar.

Dre vurzud bemdez a zizro
Guall heur divar ar vartolodet,
Pa zaill ar mor braz dindann'ho,
En ho listri heb stur ha brevet.
Enep an dour hag an avel,
He brec'h a zalc'ho al lest m'ar pleg,
Surroc'h evit n'alfe derc'hel
An heor houarn pa stag er c'herreg.

Nag a zoudard ve diouallet,
Dre he madelez, er brezellou ;
Nag a dud e deuz savetet
Euz ar maro, euz a glenjejou ;
Biscoaz den n'en deuz niveret
Ar burzudou a ra he bennoz,
Stancoc'h int evit ar stered
A luc'h var an oabl pa zeu an noz.

Deut eta, Bretoned fidel,
Deut oll da zevesiou ar pardon,
Epad miz Eaust euz he chapel
Tostaït oll gant devosion.
M'ar deo calon tener Mari,
Eur galon carguet a drugarez,
Anna he mam evidomp-ni
Ne deuz ket nebeutoc'h carantez.

Santez Anna var ar Palud
Bezit da viquenn hor patronez,
'Vel hon tud coz ni ho salud,
Diskuezit d'homp ker braz madelez.

Evelse-bezet-græt !

C. Helgouat

IMPRIMATUR :

1 Julius 1873.

† D. ANSELMUS

O. S. B.

Ep. Corisopit. et Leonensis.

Quimper, typ. Ar. DE KERANGAL.